

(391)

Janned d'Arc.

1429.

Carantéz va mam-brô ! m'ho ped d'am inspira,
 Erit m'ellin hirio dont amâ da scrifa
 Var sujet Janned d'Arc, plac'h carquet a vaillanz,
 Enor an oll merc'hed, haroses bras a Franç;
 Deus a greiz va c'halon, me ho ped da zonet
 Da laqat anaout etouez ar Vretonet
 Petra voe Janned d'Arc, victim tud inhuman,
 Mes carquet a enor gant an oll Francisien.

Er villajen vian demeus a Domremy,
 Tostic da Vaucouleurs, goeac'h en un ty
 E chomme Jacques d'Arc hac Izabel Rome,
 Labourerien douar hac a garrue Doue.
 Etouez o bugale e remerqet Janned,
 Pehini a vije o vessa an denved.

(392)

Dindan eur verzen fô en em laqe bemde,
 Hac eno gant feiz vras a galon e pede;
 Goude en em laqe da neza, da c'hriat,
 Erit rei d'ar beorien un nebeudic dillat.
 Crén ha courajus voa evel ur gür leon,
 Ha douç evel un oar : leun e voa a galon.
 Abaone bianic e rê an aluzen
 Aliessa m'elle hac hervez e moyen;
 Carout a rê dreist oll Doue hac ar Verc'hes,
 Hac eur blijadur vras e devoa alies,
 Pa dremene er vîo pelerinet fatic,
 O repu en e zy gant ur soign manific.

Eur vech e voa cousqet trafiquil evel un œl,
 Hac e vel dre e c'houq an arc'hœl Sant Mikel,
 Gant e ziousqel aour hac en gûisqet en guenn,
 Ur gurunen perlez voa pozet var e benn.
 Ar plac'hic paour a voe spouronet oll, sivoas !

466

Mes messenger Doue dei prim a lavaras :

- « Janned, na perz nep aour me deu a bers Doue
 » Da ordren did reded da zicour da Roue ;
 » Da choabet en deveus evit savetat Franç ;
 » Te eo a rei sevel siech k'ar Orleans.
 » Ac'hane 'c'hambrouqi da gutter Reims an Dauphin
 » Evit beza sacret. Eno verzo ar fin
 » Deus ar perz en deus dit gourc'hennet Doue :
 » Distro neuze d'ar gutter ha ped vit da roue. »
 — « Penos, eme Janned, ec'h elfen-me bigen
 » Servicha er quis-se' Roue ar Francisien ?
 » N'oun nemet eur plac'h paour ; biscoas marc'h na bignis,
 » Ha calz nebeutoc'h c'hoas arme na gunduis »
 — « Sent da urzou Doue ha gra e volente :
 » Me a zistro bremâ da dreid e Vajeste. »

Janned, confiant oll en urzou e C'hrouer,
 A quita gant glac'har e zad hac e mam guer,
 Hac e qerz da Chinon, el lec'h m'oa ar Roue
 Digoncertet en oll etouez tud e arme.

Janned a voa var varc'h ; brilla rē var e fenn
 Eur c'hasq eus ar c'haera gant ur blumachen venn.

- « Sir, emei, me zo deut demeus aberz Doue
 » Da offr dec'h a galon va brec'h ha va bue.
 » Eur c'hleze zo coachet adrec an auter - vras
 » Ebars ilis santerz-Cathel a Fierboas ;
 » Grit fouilla er plas-se hac e verzo c'avet :
 » Eus ar c'hleze - se, sir, me dle beza armet. »

Mont a rejot diouc'h-tu, hac er c'havjot hep poan :

Janned a boq dezân hac er laqa buan.
 Sailla ra var e marc'h, ha carquet a vaillanç,
 E cri aboës e fenn : Qerzomp da Orleans !...

En e dorn e talc'he eur quiton lien quenn,
 Arnet a fleurion lis hac a franç aour melen.

[franz = franch]
avec des franco

Scrifa ra da Bedford, general ar Sauzon,
 Deus feurs Roue an ên donet en den quirion
 Da sevel ar siech demeus a Orleans,

Ha da scarza ractal ouz rouantelez Franç.
 Mes Bedford, insolant, d'hon haroses yaouanç
 A respont dre gomzou qer vil evel ar franç.

- « En hano hon Doue, eme 'r plac'h a galon,
 » Saillomp, ni, Francisien, var arme ar Sauzon ;

(395) » Das var an dud vil-se. Va heuillit, me vo 'r penn :
 » Discomp dê petra eo courach ar Francisien
 » Pa glasq an estranjour donet da vahomi
 » Gant e oll insolant, ar Franç gaer, hor brô-ni»
 Janned, leun a gourach evel eur giir leon,
 A goe vel ar gurun eno var ar Sauzon;
 Chasseet int gantê demeus a Orleans:
 Doue zo evidomp, ar victor zo d'ar Franç!!!...
 Redec a ra diouc'htu da gavet ar roue.
 « Sir, emei, me ho-ped demeus abers Doue
 » Da zont ractal da Reims vit ma viot sacret,
 » Gent ma vin diouzoc'h da vigen separet...»
 Neuz e en ilis Reims voe sacret ar Roue,
 Dre gourach Janned d'Are hac ar c'hraç a Zoue.
 Janned d'Are o veza grêt en oll e dever,
 A c'houlennas neuz distrei ractal d'ar guer;
 Da rei sicour d'e zud, da vessa e denved
 Ha da bedi Doue geit ma vije er bed.
 Daoust d'e oll goulennoù, ar roue e refus;
 Mes adalec neuz Janned voe maleürus.
 E siech Compiègn, gant ar Sauz gemeret,
 Vo e casset da Rouan evit beza barnet;
 Gant tud vil, execrapl, carguet eus a venjanç,
 Eo condonnet d'an tan haroses yaouanç Franç!!!...
 N'eljont get caout enni nep crim, nep si james,
 Hac en e c'hondaonjont evel ur sorcerez!...
 Pa voe stringet neuz e bars creiz, ar bern tan,
 Gant ar Sauzon pere a voa mestr e Rouan,
 E clêvet Janned d'Are deus eur vouez truezus
 O pedi vit ar Franç, en hano a Jesus,
 Ha ne heane get bepret da implori
 Misericord Doue e creiz ar maro cri.
 An tan a zo croquet qerqent eus a bep tu,
 Ha Janned d'Are ne deo nemet foultr ha ludu.
 E c'halon hep mui qen en antier voe casset,
 Dre ur vertuz divin e voa bet conservet.
 E barnerien barbar vo atao excret,
 Pa gomzot diouti, dre bevar c'horn ar bed;
 Mes hano Janned d'Are vo meulet da vigen
 Gant enor ha gant gloar etouez ar Francisien.

mis du 1841. A. Lédan.